

# Chanson an Efer Gouin

TON : *Santez Anna*

1

Me o suppli kristenien, en hano Jesus-Christ,  
Komprenit va c'hanouen, rag meurbet eo trist.  
Va sujet eo ar boesson an alcool milliguet.  
Glahar an dud a fesson, rouin ar Vretönnet.

2

Setu aman va histoar, eun exempl goal spontuz,  
Eun tad, eur mab hag e hoar, bete neuze evrus  
Bewa rind mad assemblez gras d'ho sobriete,  
Mes an diaoul a zeuas da troubla an tri-ze.

3

Eur zulvez, ar potr yaouank a rankönr eun otro.  
Bonjour, emezan pot koant, me o klask a bel zo.  
Me meus teir gondision da rei dec'hui da choas  
Hag an aour eur milion, choasit o havantag

4

Petra, me ar potr yaouank a houlfet e vit-ze  
An aotro, gan aer gontant a guinigaz neuze,  
Ma keres laza da dad, pe skei e var da hoar,  
Pe efa gouin. a gouin mad, te vo pinvik dispar.

5

O pebeus goul direzon laza ma zadik kez,  
Pe skei va hoar guez mignon, m'en tou ne rin jamez.  
Me efo gouin dre vöder evit kaout ho harhant  
Hag an diaoul ken zeder ar lar me zo kontant.

6

Ar paot yaouank a redaz dar guer de direien,  
Hag evel ma tigoraz wa leun a aour melen.  
Kargan' reas he hodellou evit prenan ar gouin,  
Hag e tremp e vuzellou ze dennas da wal fin.

7

Breman en osteleri e kaf eblijadur,  
Er harto en odivi, hag er visso impur.  
An tad gand tristiguer a lavarez d'he vab :  
Va buguel, laka ewes, da gundu neo ket mad.

8

Ar mab, vit ar vej kenta, na respontas netra  
Mes kounner a wa ennan, ma return da efa.  
A pa zistroas dar guer, muioc'h meo adarre  
Divergont vel Lussifer e vallozi Doue.

9

Pa hantre e ty e dad, e dad gant eur voes dous  
An delo 'ne zaou lagad, va mab, ra ket a drous,  
Efet e peus adarre, pebeus glahar eo ze,  
Kol da gorf a da ine, sonj en Otro Doue.

10

Neuze ar mab en kounner eus rebecho ken mad  
A sko e dad ken pounner, ma lazaz mik e dad  
A da rebecho e c'hoar, e sko e hoarik paour  
Setu aze an histoar eus ar gouin hag an aour.

11

Pa heo divewet ar mab, e galon zo mantred  
Pa ouel neus lazet e dad hag e hoar gues skoet,  
Kemeret eo prisonier dret aret ar justis,  
A kondavnet ar mävier dar marw en hourdassis.

12

Laket eo er selulen da hortos ar maro,  
Zonjit ennant kristenien penos e skuil delo  
Kollet eo korf hag ine allas dre fot ar gouin,  
Hag e ben-a vo trohet dindan ar guillotin.

13

Brema tadou a mammou pere zav bugale  
Disket dei o fedennou, rei dei komsou Doue.  
Grit d'hei lenn an Aviel guir-denzor ar furnez.  
Ha guillotin Breiz-izel na grenno den james.

14

Ar gwin, ar gwin ardan a goust arhant hag aour.  
Hag e rent an den mechant hag ar familiou paour.  
Eun den meo a zo noazus d'he vreg, d'he vugale  
Hag eun den goal danjurus a tao e pep contre.

15

Evit kaout grasso Doue prenit eun Aviel  
Gant va Almanak newe noufac'h ket ober wel,  
Ha da vloa nep a vevo em c'hlako zur are,  
Rag Doue o penigo c'houi hag ho bugale.

F. LE QUÉRÉ.

Favoriser l'ivrognerie pour en tirer un profit commercial, c'est certainement le mode le plus criminel d'Assassinat avec Vol qui ait été pratiqué.  
RUSKIN.

# Kentelliou ar Verred

TON KATOLIK : Diskomp oll Kristenien

Selaouit koz ha yaouank  
Selaouit va c'homzou.  
Tud dsket tud a skiant  
Arretit o pajou  
Ha c'houi noblans pinvidik  
Prinsed pe Rouane  
Kerkouls ar paour reuzeudic  
Demp assemblez hirie.

C'houi pere zo orgouillus  
Hag huel a speret  
C'hui gred e zoc'h didrec'hus  
Mes deuit d'ar verred  
Bars e lec'h ze a zilans  
Ni gavo peadra  
D'izellat hon arrongans  
Hon orgouil ar brasa

Swelomp aman deposet  
Korf eun den eloquant  
Hag e vijet admiret  
Evit e holl dalant  
Sellomp deus e vuzello  
Penaos in dislivet  
Gant c'hozien ien ar maro  
Ez in breman zerret !

Pelloc'h zo eun den vaillant  
Ha gallondus hep mar  
A nevoa nerz eur geant  
Pa oa var an douar  
Mez kollet en deus breman  
He nerz ker bras brudet  
Gant eur prenw eun disteran  
He gorf zo remuet !

Du hont en kreiz ar verred  
Ebars er c'heeran be  
Eur prinz a zo deposet  
Marteze eur Roue  
Mar diskendomp er be-ze  
Ni a welo hep mar  
Petra eo an dignite  
En kalon an douar !

Goude beza gounezet  
Goal galz a vroadou  
Breman a zeo dispennet  
E zillad a dammou  
Goude beza commandet  
Eur boblad vras adud  
E gorf brema d'ar prevet  
A renk paea tribut !

Aman dindan eur men glaz  
Taillet gant an natur  
Hep kurunennou na kroas  
Na ken neubeut scriptur  
E zeuz, ni a zo serten,  
Gant an holl ankouet  
En Kreis tre peva flanken  
Eur paour eur c'hlasker boued !

Heman a oa mepriset  
Pa oa c'hoas en bue  
Mes breman e zeo rentet  
Ingal d'ar Rouane !  
Douar a bep-tu d'ezan,  
Evel ar Rouane  
Douar a zo dindan han  
Ha douar vo var c'horre !

O maro ! te a brezeg  
Demp an egalite  
Gra ma nem garfomp bepred  
Ha ma garfomp Doue  
Ha goude ar vuez-man  
En kichen hon Doue  
Holl e jouisfomp ganthan  
Vit au eternite.

En hon tiez pa vefomp  
Distro eus ar verred  
D'on holl mignoned leromp  
Petra hoñ bo-gwelet  
Hag en anzer da zonet  
Mar keront profita  
Ne lesfont ken ho speret  
D'en em c'hlorifia !

J.-L. DAVID.

# IEZ AR BRETON

Galek ha Brezonek

TON : Au Sang qu'un Dieu, etc...

Deuz lan da di c'hamalad  
*Tous-he-ben*, le vieux Breton,  
Da farsal ha da Vrigouillad,  
En composant une chanson.  
Ma rañ hon zud yaouank bepred  
Quand ils iront aux pardons,  
Pa zanso Jakez gant Jannet  
Chante toujours du breton.

Ia Jakez var guir vignon ker  
Quant à Jeanne tu feras la cour  
Laka da boan a da breder  
Pour lui bretonner toujours.  
Ar brezonek a zo eur iez  
Qui touche le cœur des Bretonnes,  
Ha pa he gani mad Jakez  
Tu plairas à ta mignonne.

El leuriou nevez n'ebatou  
Quand vous irez, jeunes lurons,  
Kanet atao hon chansonniou  
Sur nos airs, nos vieux tons.  
Vit ma laro ar c'halloued :  
Voilà des braves Bretons,  
Pere ar gar da virviken  
Leur pays et ses chansons.

Pa vi skoulmet euz Perina  
Par le maire à la mairie,  
Lavar atao stard heb krena :  
Ar ia goz et non le oui.  
Evit ma lavaro peb den :  
C'est un gars de sang breton,  
Pehini a zalc'h da viken  
A cette langue des lurons.

Iez brezonek, iez biniguet,  
Aboe pell zo komzet n'hon c'hreiz  
Na vezit ket c'hoas douaret  
Gant holl enebourien Breiz.

En keit ma pado da vein galet  
Da wez dero koz da warimou,  
Te chomo stard he za bepret  
Rag te iez koz eo iez ho bro.

Evel ma kar Jakez et Jannet,  
Ha ma verz he galoun pell outhi,  
Cant ar Vretounet ont te karet  
A rum da rum c'houek en pep ti.

A. C.

## LA MARSEILLAISE DES TEMPÉRANTS

Sur l'air de la *Marseillaise*

I

Chers amis de la Tempérance,  
Debout pour sauver les buveurs !  
Secouons notre indifférence !  
Unissons nos voix et nos cœurs ! (bis)  
Le vin, les liqueurs et la bière  
Vont ruinant notre pays ;  
Ils feront d'un vrai paradis  
Un enfer sur un cimetière.

II

L'ennemi, comme une sirène,  
Chante au buveur des airs si doux,  
Qu'il les captive et les enchaîne,  
Et les endort sur ses genoux ! (bis)  
Ah ! d'un sommeil si délétère  
Courons, courons les réveiller,  
Avant que, de cet oreiller,  
Ils roulent sous la froide pierre.

III

Ce qu'il vous fait boire, ô victimes,  
Votre Ennemi, c'est l'eau de mort,  
L'eau qui fait germer tant de crimes,  
Qui change en cœurs vils des cœurs  
d'or. (bis)  
Voyez son réservoir immense  
Toujours bien approvisionné,  
Car si la vigne a peu donné,  
L'alambic lui rend l'abondance.

*Refrain*

A l'œuvre tempérants !  
Point de lâches en nos rangs !  
Chantons, chantons ! et pleins  
d'ardeur,  
Marchons en conquérants !